



C'h-gellenner.ez BBTK

Kinnig labour embannet d'an / ar jeudi 21 mai 2026

Lec'h : **Karaez**

Doare post **CDD** H/F

Padelezh **Bloavezh skol 2026-2027**

Gwengolo 2026

Deskrivadur ar post-labour

DESKRIVADUR AR POST

Kelenner.ez war ar c'helenn teknikel evit ar vachelouriezh vicherel Buheziñ Bugale ha Tud Kozh (BBTK) e Lise Diwan Karaez ; 14 eurvezh kelenn + labour prientiñ + labour melestradurel ha kehentiñ. Kenlabour a dost gant an div gellenner.ez all a zo o kelenn er rann BBTK hag ar peurrest eus ar skipailh pedagogel (30 den bennak ennañ).

Gopr : etre 1500€ ha 1800€ dre viz war ar bloavezh-skol (1200-1500€ da vare ar vakañsoù-hañv) hervez ho tiplomoù hag ar c'hargoù tapet ouzhpenn el lise.

KEFRIDIOÙ

Sevel ha kas kentelioù teorikel liammet gant ar buheziñ (rummadoù tus, teknikoù kehentiñ, reolennadur,pedagogiezh...), gant an deskadurezh d'ar yec'hed ha d'an endro hag an heñchañ

Sevel ha kas raktresoù buheziñ asambles gant al liseidi (skouer : krouiñ ur c'hoari vras evit bugale ur greizenn dudi, dizoleiñ buhez un EHPAD ha kas abadennoù buheziñ eno)

Ambrougañ ar skolidi da vare klask stajoù ha mont da welet anezho e-pad o stajoù

Priziañ labour ar skolidi

Kehentiñ war an hentad micherel war-zu ar skolajidi, ar gerent, ar skipailh pedagogel...

Kemer perzh e buhez al lise (dorioù digor, bodadoù kenlabour, devezhioù degemer...)

Skiant-prenet ha barregezhioù goulennet

BARREGEZHIOÙ

Sevel ha lakaat e plas un deiziataer labour (bloaziek, c'hwec'hmiziadek ha sizhuniek)

Mestroniañ metodologiezh ar sevel raktresoù

Azasaat ouzh barregezhioù hag ezhommoù ar skolidi

Kenurzhiañ, daremprediñ aes gant an dud

Selaou

Brezhoneg flour dre gomz ha dre skrid, bezañ gouest da gas kentelioù sklaer er yezh-mañ

Un danvez arbennikaet pe meur a hini a zo talvoudus e bed ar buheziñ (sport, arzoù, labour dorn...)

PROFIL

Diplom war ar buheziñ (diplom micherel, DABU / DARE) pe traoù all evit tapout ur VAE

Bezañ urzhiet gant e labour ha kaout ur spered skipailh

Skiant-prenet war ar buheziñ, ar c'helenn / ar stummañ

Gouzout merañ ur strollad krennarded

Kaout ur rouedad e bed ar buheziñ, hini ar buheziñ brezhonek peurgetket

Aotre bleniañ

STUZIOÙ LABOUR

Posubl eo goulenn e vefe strollet ar c'hentelioù war 3 devezh.

Posupl eo feurmiñ ur gambr el lise (War-dro 10 €)

Devezhioù stummañ da heuliañ e fin miz Eost, e deroù vakañsoù an Hollsent hag e deroù vakañsoù miz C'hwevrer (aozet gant Diwan ha Kelenn).

MA Z'OCH DEDENNET GANT AR POST, KASIT HOC'H EMSTRIVADUR (CV+LIZHER EN EM GINNIG) DA EIL.DEREZ@DIWAN.BZH.

Sellout ouzh ar c'hinnig : <https://diwan.versio.fr/br/offres-emplois/un-e-professeur-e-aepa-210520261414>